

LAVAROU KOZ.

Da c'houzout ouz anñ amzer:

Aliez ar wenn reo,
A zeu araog ar glao.

Reo guenn var ar c'hresk,
Amzer gaer ha fresk.

Reo guenn var loar nevez,
A denn d'ar glao aliez.

Reo guenn en distar,
Amzer c'hleb hep mar.

Brumen du pa vez,
A bad tri dervez.

Brumen vor,
Tomder en gor.

Mogedenn divar ar mor,
Heol tomm ken a faout anñ
nor.

Ann avel su ha gevret,
Mad d'ar goulllo ha d'ar garget.

chrest
Avel a c'hreste,
Glao hep dale.

Coneset
Gualarn ~~talmet~~ diouz ann noz
Su pe gevret antronoz.

Pa val'r vilinn divar ar c'hoad
'Ve trist doare ar merdead.

Di vallit rag ar mervent ~~ez~~,
Hag ar gualarn iaouank.

Pa vez anñ avel er gornaouek,
E vez tapet meur a c'henaouek.

Heol a zavo re vintin,
A zo ~~tee-het~~ da ~~vall~~ fin.

techet
Anñ heol guenn,
Da c'hlaou a denn.

Heol guenn a ra glao,
Hag heol ruz amzer vrao.

Ruijenñ ~~deuz~~ anñ noz,
Glao antronoz.

Ruz dioc'h anñ noz, guenn d'ar
mintin,
Laka joaüs ar pec'hirin.

Canevedenn dioc'h ann noz,
Glao pe avel antronoz.

Gwarek-glao euz ar betre,
Stignit ho tevez koulskoude.

Canevedenn dioc'h ar mintin,
Sin vad d'ar pec'hirin.

Canevedenn araog ~~de~~g'heur,
Rei he lein d'al labourer.

Canevedenn araog ~~de~~g'heur,
Treat'h ar zec'hor d'ar glebor.

Kelc'h loar dioc'h ann noz,
Glao pe avel antronoz.

Kelc'h a dost,
Glao a-bell ;
Kelc'h a-bell,
Glao a dost.

Glao da zul, glao da lun,
Glao epad ar zizun.

Glao a zeu di ^ovar greisteiz,
Glao epad ann deiz.

Glao dioc'h ar viz,
Glao epad ar miz.

Kurun dioc'h ar ~~g~~ualarn,
Tol ar varr er sanaill.

Kurun dioc'h ar gevret,
Marrad bepret.

Pa grosnolo ar mor,
Paourik, sarrit ho tor.

Ma ia
~~Ma~~ d'a an arne d'ar menez,
Kemer da freill ha kerz er mez;
Euz ar menez ma ~~d~~a d'ar mor,
Sarr ~~v~~arda gein prenest ha dor.

*Un eb a gar re arginin
it & vo doue a beul ar fur.*



*Red es du zerc'hel mael gae
Beza puvridie bra pe luer.*

*She ar vad machell
D'ar vev an' pagnac
She ar vad machell
D'ar vev an' pagnac
She ar vad machell
D'ar vev an' pagnac
She ar vad machell
D'ar vev an' pagnac*